

# KANTIK

## CHAPEL SANT KADOU

**e parrez Gouesnac'h.**

Var don : *E Sakramant ar Binijen.*

### Diskan.

*O Sant Kadou, euz lein an Ee,  
 Hor zikourit, hed hor bue,  
 Da c'hourin enep ar pec'hed  
 Ha da rei lamm d'an drouk spered.*      } bis

### 1.

Meulomp Sant Kadou beniget,  
 Ar Zant e Gouesnac'h ken karet,  
 Meulomp he vertuiou santel  
 Ha d'ho heulia bezomp fidel.

### 2.

Euz a Vro-Zoz oa ginidik ;  
 He gerent oa tud pinvidik,  
 Mes an danve, an henoriou  
 Ne oant ket trec'h d'ho c'halonou.

### 3.

Gantho e teskas ho bugel  
 Kemer abred plegou santel.  
 Pa ve parfet eur vamm, eun tad,  
 D'ho bugale pebez eur-vad !

4.

O Sant Kadou, dre ho peden,  
Sikourit ar gerent kristen  
Da zevel mad ho bugale,  
D'ho zevel e doujanz Doue.

5.

'Vit ren eur vue sahtelloc'h,  
O karet Doue kalz guelloc'h,  
He dad a zilezas a-grenn  
He balez hag he gurunen.

6.

Sant Kadou ne zalëas ket  
Da zilezel ive ar bed.  
Guell e kav kouent Lankarvan  
'Vit tròn ha palez Glamorgan (1).

7.

E Lankarvan, yun ha pedi  
A zo d'he galon eun dudi ;  
Laouen e ro he holl vadou  
D'ar beorien ha d'an ilizou.

8.

Laket e penn an abati,  
Ar Zant hen renas difazi ;  
Ken skeduz oa he zantelez  
Ma oue leshanvet « ar Furnez ».

9.

Kalz tud yaouank oa 'n he gouent  
Laket er skol gant ho c'herent.  
Dezho, d'ho c'helen, e roas  
Ar manac'h brudet Sant Weltas.

(1) Elec'h kemer plass he dad e penn rouantelez Glamorgan,  
Sant Kadou en em dennas e abati Lankarvan

10.

Sklerijennit, o Sant Kadou,  
Spered an tadou, ar mammou,  
Ma velint eo eun never striz  
Kelen ervañ ar yaouankiz.

11.

'Vit entent ouz Doue guelloc'h,  
Kadou ha Weltas, divêtoc'h,  
'Lakas 'n ho zonj mont da bell bro  
Ha beva en eul lec'h distro.

12.

An daou Zant, o treuzi ar mor,  
A zigouez beteg hon Arvor.  
Ar pez a glaskent e kavont ;  
Bep a enezen e choazont.

13.

Kadou euz he lochen ermit  
Gant laeron-vor oue kasset kuit.  
Pa rankas tec'het ac'hano,  
Da Vro-Zoz e iëas en dro.

14.

Kasset oa di gant dorn Doue,  
'Vit beza eskop heb dale.  
'N he garg huel, nag a c'hrassou  
E tennas var an enëou !

15.

Doue 'vire dezhan, ouzpenn,  
Kurunen gaer ar verzerien.  
Tud kri, dilammet var he vro,  
'Roas dezhan tol ar maro.

16.

O Sant Kadou, merzer santel,  
Na zeuit biken d'hon dilezel.  
Hor zikourit, dre ho peden,  
Da zerc'hel stard d'ar fei gristen.

17.

Da Zoue, d'he Iliz santel  
Hirio kalz tud a ra brezel.  
D'hon difen astennit ho prec'h  
Ha d'an dud fall ni a vo trec'h.

18.

Mar sav brezel, eun de da zont,  
Roit deomp difennerien dispont,  
Mirit na ve hor bro garet  
Gant an enebour diskaret.

19.

En eur vont kuit euz ar bed-ma,  
Pa vo ar stourmad diveza,  
Sant Kadou, pedit 'vidomp holl,  
Evit ne zaï nikun da goll.

J. B.



**Imprimatur :**

Quimper, le 24 Juillet 1912,

Em. FLEITER, v. g.